

# GUERZ SANT ALAR HA SANT HERBOT

Var don : Ar Roue Gralon ha Kear ha Is.

Tud Breiz-Izell, deud da glevet,  
Ar wers neves a zo savet,  
Ar wers neves a zo savet,  
'N'henor sant Alar biniget.

Sant Alar e Limoj c'hansas,  
Hag e ker Noyon he varvas,  
E ker Noyon varvas Alar,  
Ar zant azo c'hoas eb he bar.

Tad sant Alar he oa Eucher,  
Ur mignon d'ar Roue Cloter,  
Hag he vam he oa mignones,  
Mignones vrás d'ar Rouannes.

Beteg an Orfrebour Abbon,  
Ias Eucher, nec'h enn he galon,  
'Vit e bedi da rei micher  
An Orsfrebourien d'he vab ker.

Abbon ractal'vel m'hen clevas,  
Da Eucher neuze lavaras,  
Digassit d'am c'havet ho mab,  
Ha me enn fisco penn ha cap.

Ur pennad goude ze Cloter,  
He c'hourc'henn da vab Eucher  
Monnet prim d'he Lez d'enn cavet,  
Ma vije gant-han henoret.

Sant Alar pa glev kement-se,  
Oe stravillet corf hag ene,  
Ne ouie petra da sonjall  
Da sonjall deus Roue Bro-C'hall.

Evel-ken he ias gant Abbon,  
Beteg he lojeis da Vobbon,  
Ha Vobbon he ias ractal gant-han  
Beteg ar Lez eb marc'hatan.

Ar Roue doc'h-tu m'hen guelas,  
Da zant Alar hé lavaras,  
Alar va mab deud ganneme  
Da bourmeni eb pell dale.

Aotrou Roue me iell ganec'h,  
Lec'h ma carfoc'h eb cavet nee'h,  
Va flijadur vezò monnet,  
Ganec'h elec'h ma c'hoantefet.

Neuze Alar hag ar Roue,  
He ias ho daou enn han 'Doue,  
ENN han 'Doue da Bourmeni  
Ho c'halonou leun ha zudi.

Pa oa d'ho baleenn divez,  
Ho daou he tistrojont d'ar Lez,  
D'ar Lez ho daou he tistrojont,  
L'ech eb pell dale n'ur gavjont.

Er Lez ractal ma n'ur gavas,  
Sant Alar n'he gampr zaoulinas,  
Ha zaoulinas evit pedi  
Ar Roue hor c'harg ha zudi.

Pa oa sant Alar daoulinet,  
Prestig goude chomas cousked,  
Ha dre he gousk credre d'zhan  
Clevet Doue ho coms hout-han.

Doue dezhant he lavaras,  
Alar te vezò ur zant bras,  
Gant ann holl ha vezi caret  
Kencouls ann dud hag ar lœnnet.

Te reio dre ann holl vroiou  
Un niver vrás deus ha vulliou,  
Ann holl ha c'hanout ha garo  
Beteg ann heur deus ho maro,

Neuze ar zant ha zifunas,  
Hag ha greiz calon ha bedas,  
D'enn scoazella Crouer ar bed,  
Ha d'enn divoal deus ar pec'hed.

Abœ ann holl amzeriou-ze,  
Sant Alar, en nos hag en de,  
E deus gred cals deus ha vulliou,  
E Breiz couls hag er pell broiou.

Guechall tre Lanveur ha Guimec  
He hoa laeret daou ha guezec ;  
Da zant Alar pa ouient guestled,  
Prestig goude he ouient cavet.

Ann holl dud ha zo sicouret,  
Gant Alar, ar zant beniget,  
Hag evel-se var ann douar  
Ann boll bihan ha bras e kar.

Hag he vefenn pad va bue  
Ho coms dihout-han nos ha de,  
Biken n'he alfen lavaret  
Ann holl miraclou e deus gred,

Breman pas m'eus d'ech divezet,  
Bue sant Alar beniget,  
Silaouit c'hoas, tud Breiz-Izell,  
Guers sant Herbod, ann denn zantel.

Sant Herbod he oa ginidic,  
Ha ouent huel ha pividic,  
Bars en Hiberni he c'hannas,  
Hag e Breiz-Izell, he varvas.

Pa oa bihan gant he gerent,  
Ha bede Roue ann holl zent,  
D'enn sicour e pad he vue,  
Ha da gemer hout-han true.

Un deves pa oa sant Herbod,  
Var he zaoulinn e tal ann oad,  
E tal ann oad var eur garec,  
Ho deuas eun eal he veteg.

Hag ann eal lavaras dez-han.  
Kuila, Herbod, prim ar lec'h-man;  
Doue e deus va digasset,  
Deus he varados da cavet.

Ar loennet corn un niver Iras,  
E Breiz-Izell, he varv siouas,  
Gantar c'hlenvedjou he varvont,  
Bemde ha varv ouspenn tregont.

Mes te ho iac'heio timad,  
Gant sicour Jésus hag he dad,  
Jesus hag he dad da heuillio,  
Hag ar loennet te iac'heio.

Treuj ar mor, poent eo did monnet,  
Da iac'had da Vreiz ar loennet,  
Poent eo ded treuji ar mor  
Ha disken e douar Armor.

Ann eal var-ze ha zav'd'ann henv,  
Ha sant Herbod he galon c'renv,  
Enn eur lakas enn hent ractal,  
Vit dont da Vreiz eb marc'hatal.

E Breiz pas oa enn ur gaved,  
N'ur lec'h zo Plouneves anvet,  
Savas ractal eur Minic'hi,  
Gant un aoter evit pedi.

Prestig goude enn eur lakas,  
Da brezeg Herbod arzant bras,  
Ha da iac had tud ha loennet,  
Dre neis Doue crouer ar bed.

Ar loennet kencoul hag an dud,  
Ha rente iac'h bras ha muuad,  
Bras ha bihan ho rente iac'h,  
Ne dalv da zen abet he nac'h.

Ar vrud redas eb dale pell,  
Deus burzudou an den zantel,  
Ha roue Breiz he levare,  
Me iello prestig he vete,

Gant c'houec'h kant ha guezec ster-  
He deuas eun den d'en cavet, [net,  
Evit gouzout hag ar zant kez,  
Deuie da chom gant-han d'he Lez

Mes ar zant lavaras dez han,  
Ne dinn biquen deus ar lec'h-man,  
D'ar lec'h-man he zon digasset,  
Hag er lec'h-man vinn douaret.

He bars e Plouneves-ar-Faou,  
Ne lavarant ket dech ha c'haou,  
Zo savet dez han ur Iliz,  
Kearoc'h evit rehiou Ker-Is.

D'ar guemer rog sul an Drindet,  
N'henor sant Herbod biniguet,  
Ve eur Foar vras e Plounevez,  
Abalamour d'he vadeles.

E pad Miz mae enn Plounevez,  
Veler loennet ho tont bemdez,  
Da velout Herbed biniget,  
Rac hen eo scoazell ar loennet.

Saint Herbed gant un tamic zell,  
Iac'ha loennet corn Breiz-Izell,  
Gant eun tamic zell ha drue,  
Ho laka iac'h pad ho bue.

Rac se tud Breiz, bras ha munud,  
Lakomp da vont dre holl ar vrud,

Deus Herbed an den burzodus,  
A zo guir vignon da Jesus.

Neb bed sant Herbed biniget,  
Biken n'en d'ho kollou loennet,  
Nikun dihout-he n'he gollo,  
Hag ar Barados en devo.

Visant COAT.

Propriété de GUILLAUME MERRER.

## GUERZ

*war sujet ar re zo bet beuzet enn Peros-Guirec, hag ar  
re zo bet devet enn ty kear Crozon, bloavez 1882*

Var eunn ton anavezet.

Speret sanctel, men o ped,  
Da zont da zigueri va speret,  
Evit gallout dec'h discleria,  
Da vretonnet ar vroman.

Ar sujet demeus ar malheuriou  
A so erruet harz ho bro.  
Bremen po heus c'hoant da glevet,  
Ar malheuriou so erruct.

Deus ar beure pa int savet,  
En deveze ma voa determinet  
Ne sonjet qef sur an dese,  
E rankhent coll ho huez.

Bremen c'han da lavaret  
Annoiou ar vortolodet,  
Tudal Guiomard, patron,  
A voa ho perrissa er mor don;

Guillaume Belec a Pierre Jégou,  
Jeanne-Marie Havedec a hano,  
Pierre Thomas, an eil cabiten,  
O deuz finisset o buez en anqen.

Yves Daniel, Joseph Daniel,  
Assembles o deus eur maro cruci;  
Yves Periou capiten huel,  
Noël Le Goff, novis annuel.

Seiz intanvez a vez gret,  
A tri varnugent a vinoret,  
Nag a c'lac'har hag a irvoud  
A so en Peros Guirec partout.

Evit ho eneou kaera grag,  
A greis ho spouron hac a glas  
He deu Jésus d'ho c'honsoli  
D'ho kerc'hat dann env d'en veuli.

Uz ar vortolodet, eur sclerijen  
Avoa bet guelet o tisqen  
A so dis jennet voar ho bag  
Evit querc'hat ho eneou mad.

Biscoas nint bed en glac'har,  
Evel maont bieman var an douar  
Ho velet ar vortolodet a so beuzet,  
Hac ho c'heren de a zo glac'haret.

Cri vije ar galon ma vez deploret,  
Ar mous kerqen e dad lamet  
Adieu, va sad, me ar bugel kes,  
Min ranq perissa assambles.

Cri evije ar galon a ci ma ne voelje,  
O clevet kimiadi an eil eus eguile;  
Deus ar glac'har ac ar velanconi,  
Gant ar vortolodet o veui.

Cals a dud a zo ho voela sur,  
A greis ar joa e teu an displijadur,  
Er sul variere'h, en oferen bred,  
E voa anved an dud heued.

Ac ar mamou zo bed desoled,  
A toud an dud a zo glac'haret  
Hac ho halonnou mantret,  
Ha scuilla daéloù ne qet eb sujet,  
A re so breman en fonç an dour,  
Pedomp Doue du sicour ;  
Pedomp asistanç on Doue,  
Da gaout truez deus ho ene.

En pron an oféren bred, en ilis,  
So bed lavaret eun *Deprofondis*,  
Evit ma c'hefond da repos,  
Gant Jesus-Christ da barados.

An autorite, a deus ordrenet,  
Eur guest dese a vije gret,  
Evit sicour ar vinoret.  
Dre druez a zint bet soulajet.

Etre guenta a velas an tan goal  
Evoant het commancest da grial :  
An eb so coussuet disunet  
An tan goal so goel groget

Ar pompou siouas ne voa qet  
Da laha an tan a voa croget  
Eur boobl bras a dud so diredet  
Evit guelet an tan a croget

Galvet a voa tud courajus  
Da sicour an dud malheurus ;  
Evit gallout rei de sicour  
Vije obtenet cals a recour.

Ractal evel mo deus clevet  
Quichen an tan ind neur rentet  
Vit discuel o ners o hourach  
E-kichenn an tan voa quer bras

Prestic goude en em gavas  
Eur population goall bras,  
An narcherien an duc a lez.  
Ec'h egeont d'an tan assambles.

Breman meus hoant da lavaret  
Annoiou a re so bet devet,  
Ac ar re so bet devet gant an tan.  
Coulz ar bras evel ar bian

An autreu najoingt so goel ofanset  
A so maro en hotel ar Bourdonnée  
Oaget demeus augent vlos  
Goude kals poan e perissas

Mérour d'Argol, Jaouen eilvet,  
Postic, deus Tréberan an drivet,  
Cariou, deus Braspart e ar bevar  
Ar Bris d'Argol, a Turpin, Lande-  
vennec

A re a ouser ho hano a meus laret  
Unnek so ne siouas dévet  
A so unnek a ne entre bras a bian  
Ac ho deus souffret ar miser antan.

O ! aotrou sant Laurenc biniget  
A hui alfe demp lavaret  
Peguen cruel e ze ar poaniou  
Pa renquer devi e bars ar flamou

Cri vije ar galon a cri ma ne vœljet  
En quichen mairi Croson an eb a vije  
Ho velet an tan goal qen fuloret  
A unek en ne a so perisset

Ho clevet an dud o crial  
Bars er prénecho e tan góal :  
Adieu tad ha mam emear vugale,  
Min ne neur velfomb qen en bué.

An tadou ar mammou glaharet  
Ho vélét ho bugale en tan devet  
Cri vije ar galon ma teuje da voëla  
Ho halonnou so var ar poent da ranan

Pa voa annoncet do sud ar hélo  
He carjent mont en douar gant-ho  
Adalec en heur demeus a vremean  
Betéc a siouas an heur diveza.

E bars pron en oferen bred en ilis  
A eus lavaret evite un de profundis  
Evit ma halfont mont e bars er gloar  
Pa hint devet e beo var douar

An entarament gante zo bet gret  
Ac ho sud ac ho ligne so glaharet  
Graç dezho da vont da repos  
Da veuli'n drindet er barados

Breman e teuan da finissa  
Ar wers-ma deus an truesussa.  
Guillaume Merrer, en deus hi gret,  
A souhet dech bara dous bepriet.

# GUERS AR SEIZ TORFED

Cometet gant **IAN HARMANT**, er memes nosvez, ha barne  
d'ar muro e *Lez-ar-Lez-Varnou*

Var don: *Guerz Anna Baol.*

Drindet santel adorabl, roït din sclerijen  
Ma teuin da ziscleria breman d'ar gristenien,  
An torfed zo o'eur gavet n'en deus ket c'hoas guel bell,  
Enn ur gaer zot ken brudet ha reiou Breiz-Izell.

C'houi speredjou hevurus zo curunet ergloar,  
Prestid d'inn oc'h assistans, carguet oun ha c'hlae'har,  
Roit dime ar spered 'vit gallout discleria  
Torfedjou an terrupla n'ur gavet er blos-ma.

Ann henvou hag an douar da grena e lacont,  
Kement cristen ho c'blevo ha varvo gant ar spont,  
Stracal ha rei ho c'halon, troublie rei ho spered,  
Ga glevfond an torfedjou zo gant Ian Harmant gret.

Harmant oa eun den collet na gant an debochou,  
Nos ha de vije cavet an hostaleriou,  
Hag eun nosvez ha zistro d'ar gear, ar milliget,  
'Vit ober he dorfedjou, gant satan possedet.

Greg an den-man ha oa enn he gue'e cousket,  
Ne sonje ket en he sonjou eus he goas milliget,  
Antreal ha reas n'he c'hampr ha coleret kement,  
Ma keær ann hach 'vit skei he bried paour kerkent.

Daou dol hach e deus skoet varnezhi ar c'hruel,  
Ma renk entre he zaouarn he bried paour meravel,  
Harmant oa en gwarizi deus he vreg nos ha de,  
Rac c'hoant en d'oa da gavet e danve.

Goudeze var he vreur paour Per Harmant oa saillet,  
Eun tol hach, ar malheureus, dezhant e deus roet,  
Rannet eo dezhant e benn siouas dre an anter  
Collet e deus he vue dre zaouarn ar muntrer.

He bemp bugel ho elevet an drons ken spourounus,  
Ha r  an den crimal ha oa ken colerus,  
Ha gomman as da ouela truezus o c'hevet,  
Mes ar c'hrimnal e deus ao nor varn  prennet.

Ken spontus he oa ho zad e noz se da velet.  
Gant aon ha spont arazan, pardon deus gouennet:  
En han Doue, va zad, pardonnit me ho ped,  
Ha me bedo evidoc'h Jezus Salver ar bed.

Satan oa deus er poolza hep hean e noz-se,  
Ma lac'h be vugaligou he oa pemp dihout-he,  
Goudede ar c'hrimnal 'vit cuzad he dorfed,  
Ha zortias deus he di hag en heus e gueled.

Distrei ha reas var he guis de dy an d'n impi  
'Vit ho zrailla ha damou eb kaout neb ambloari,  
En ur punz oa er jardin ho zao'as gonde ze,  
'Vit cuzad he dorfedjou ma aotreje Doue.

Gonde ober he grimou ar c'hrimnal ingrat,  
Ha glaske gant he vontou cuzad an tarehou goad,  
Klaskout ha rhe ho c'huzad an den fall ha barbar,  
Kencouls evel he roudjou dens scleri-enn ar loar.

Ar vein holl e dro d'ar punz gant ar goad labezet,  
'Vit cuzad he dorfedjou a za gant-han goalc'het,  
Mes Doue hag ar Were'hes n'ho deus ket permetet,  
He vije crimou ken bras chomet bepred cuzed.

Goudede ha zistroas d'he dy ar malhevrus,  
Evit kemer he repos hag e c'hoas colerus,  
Lakat ray en ho fla ou ar meublou diranjet,  
Arog monnet da gouskad an den fall milliguet.

Kemer ha reas he repos ar c'hrimnal ingrat,  
Er goele e pla  he vreg lenn he zillad a voad,  
ENN he vele ha chomas beteg ma tarz an de,  
Neuze ha zaillas er mez hag he zell ha dare.

Dorn eur bugel he gavas daou viz dez han vanke,  
Dista uet oa deus ar vrec'h p'hini er supplie,  
Er c'huzet reas er jardin kent eguet sortial,  
Ha neuze n'em disposas ractal da bartial.

Eur c'hy en devoa Harmant he voa Brutus anvet,  
Evit cavet guin-ardant he gy e deus guerzet,  
He gy e deveus guerzet 'vit cavet guin-ardant,  
Ma vije crenvoc'h-crenya he galon da Harmant.

An deves varlec'h vintin ar c'helou zo clevet  
Deus an torfedjou heuzus he oa bet cometet,  
An tarchou goad er jardin dre hol a zo güeld  
Hag ar c'horvou zo ive he bars er punz cavet.

An dud ha varn, var ar lec'h a zo he n'em rentet,  
Hag eun doctor mudusiu a zo ive elasket,  
Evit bizita an dud pere ha oa lac'het,  
Ha goude cals enclaskou dorn unan zo cavet,

Heman oa ar meducin en doa prenet he gy  
Digant Harmant, ha pa oa gant-han distro d'he di,  
Ractal he ginig dezhan da z'bri hag eva,  
Mes ar c'hy n'he gemere digant hemau netra.

Pebeuz spont e d'oa heman pa e bizitas piz,  
E goug ar c'hy he gavas siouas daou vel eur biz.  
Ne oa ket da enelaski, ar c'hy e doa debret,  
Dorn unan ar vugale pere ha oa lac'het

Ar c'hy-man eb douetanz he oa bet d'ar muntrer,  
Pehini zo comeret ebars e ber amzer,  
Interojet oa neuze, respont ra divergont,  
Penos ne oa ket cabius deus kement all ha spont.

Da dal ar punz oa cassed 'vit goeled ar c'horvou.  
Ho lont eo mez-dibout-han ha beziou ho memprou,  
Ha dre ma vijent lamet, tud ar varn ho zelle,  
Eag e enn dije chenchet ha liou e deves-se.

An dud ha varn varnezan ho deus anavezet,  
Deus al liou glaz ha zougue en doa great an torfed,  
Dirag an holl ractal anzav ar viriose,  
Kement hini zo lac'het, zo lac'het ganème.

D'ar maro ezeo barnet pa en deus meritet,  
Ha da dal ar guillotin goude eo cunduet,  
Ar belec e cundue c'houennas digant-han,  
Hag e ha oa glac'hared d'ar c'hrimou gret ganthan.

Ractal ha respont dezhan n'en d'oa keuz da netra,  
Nemet da veza lezet he guy paour va veva,  
Ma carjen beza lazet va c'hy ne vijen ket,  
Bet marteze vel ma zont bars ken bras penet.

Achui ra he vue dre ar brassa maro,  
Ar gontel he deus troc'hed he c'hong d'an den garo,  
Hag evit diskuel exempl d'a  
Ma vefont holl cals furce'l

Rac-se t-ha, tud Breiz-Izell, pedomp ha wir galon  
Jezus Christ da rei demp ni eun deis hor parardon,  
Ha da bellad dihouzimp an droue speredjou,  
E devoa selapet Doue e fonz an iferniou.

Galloud Doue azo bras he ners azo eb par;  
Evel-t-hau n'enn deus hini a bet var an douar,  
An henvou azo dezhan, an douar hagar mor,  
Hag an Ifern lec'h ma zo bepred eun tan e gor.

Kement torfed he glaskomp er bed man da zuged,  
Doue ziscuill annezhe vit ma vefomp guanet,  
An torfedjou ha recomp ha ziscuill d'ar barner  
Evit ma vezo guanet eb dale ar muntrer.

Entrezoc'h holl kristenien mar oc'h eus c'hoant elevet,  
Piou e deveus ar verz-man er bloaz-man compostet,  
Eur baleour dre ar vro hanvet Guillou Merrer,  
Ha ve cavet elec'h all pa ne chom ket er ger.

FIN,

*Propriété de l'Auteur.*



e hy en devo..  
Evit cavet guin-ardant  
He gy e deveus guerzet  
Ma vije crenvoc'h crenva he galon <sup>trown</sup> HASLÉ. — 218.